

# KANNADIG

## Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 85 Meurzh - Ebrel 2014 Priz : 3€

### **Krimea, Kosovo hag all... : Kensturiennoù ?**

Trelanket<sup>1</sup> eo bet darvezadelezh<sup>2</sup> etrevroadel kentañ trimiziad 2014 gant darvoudoù Ukraina ha Krimea, a-raok d'ar re-mañ bezañ trelanket d'o zro er meزيennoù gall gant an dilennadegoù dinazel<sup>3</sup>, ken doujet gant ar sokialourion c'hall ouzh ar galloud. Lezenn ar meزيennoù eo, kaout bepred keleier nevez evit kenderc'hel da zedennañ al lennerion, pe evit lod politikerion kaout keleier nevez, skodegus a-walc'h, evit diverkañ e spered ar foran keleier fall kent oc'h ober gaou dezho.

Betek nevez 'zo, ne oa ket kalz a dud a ouie e oa ur vro anvet Ukraina – evel Rusianed e oa gwelet hec'h annezidi<sup>4</sup> -, ermaez eus un nebeut Katoliged marteze, a skoazell an aozadur anvet “*Skoazell an Iliz en Dienez*”, e brezhoneg, hag *AED* (*Aide à l'Eglise en détresse*) e galleg. E 1991 e voe embannet gant an aozadur-se, levr Didier Rance, *Catholiques d'Ukraine*, a gonte merzerinti Katoliged ar vro-se, heskinet muioc'h

c'hoazh eget ar Gristenion reizhvriek<sup>5</sup> gant ar gomunourion. Komz a rae ivez un tammig eus an naonegezh vras aozet gant Stalin, an *Holodomor*, ma varvas ganti war-dro pevar pe bemp milion a dud, hogen muioc'h a ditouroù war an naonegezh-se a vez kavet e levr Viktor Kravchenko<sup>6</sup>, “*J'ai choisi la liberté*”, embannet e Paris e 1947, troet e galleg diwar ar skrid saoznek gant Jean de Kerdeland, ur Breizhad sañset, diouzh e anv. Tud all a c'helle gouzout ivez e voe degemeret an Alamaned evel dieuberion gant an Ukrainiz e 1941 dre gasoni ouzh ar gomunourion, pa aloubas Hitler an Unaniezh Soviedel, gant an argadadeg anvet *Barbarossa*. Ukrainiz 'zo a stourmas e kichen an Alamaned a-enep ar gomunourion, ha se a vez rebechet hiziv ouzh darsavidi Kiev gant tud Krimea, met bez' e voe Rusianed ivez – ar Jeneral Vlassov ne oa ket ne oa ket un Ukrainiad anezhañ.

Anavezet gwelloc'h eo Krimea marteze, netra nemet en abeg da vrezel Krimea (1854-1855) a reas ar C'hallaoued hag ar Saozon a-enep d'ar Rusianed a dage an Durkiz evit ober dezho

<sup>1</sup> Trelankañ : *dominer, surpasser*.

<sup>2</sup> Darvezadelezh : *actualité, ensemble des événements actuels*.

<sup>3</sup> Dinazel : *municipal, a.g.*

<sup>4</sup> Poblou c'hoar slavek eo Ukrainiz ha Rusianed evel ni, Brezhoned, gant Kembreiz, ha muioc'h c'hoazh marteze, rak n'eus ket a harzoù naturel etre Ukraina ha Rusia, nemet kompezennoù divent

<sup>5</sup> Reizhvriek : *orthodoxe*.

<sup>6</sup> Ukrainiad e oa, met ne oa ket broadelour, drouklazhet e voe gant gwazourion soviedel en e ostel e New York e 1966.

leuskel an tiriadoù slavat a zalc'hent c'hoazh e kreisteiz Europa. O toujañ ma teufe ar Rusianed da vezañ re greñv goude bezañ bet trec'h, e skoazellas ar C'hallaoued hag ar Saozon an Durkiz o tagañ Krimea hag o lakaat dreist-holl ar seziz war wikadell Sebastopol, a oa ivez porzh bras al lestraz rusian. D'ar 7 a viz Gwengolo 1855 e voe kemeret kreñvlec'h Malakoff gant ar Jeneral Mac Mahon, digoret e oa hent Sebastopol. Antronoz e tilezas ar Rusianed ar wikadell hep stourm. En diwezh, e-kerzh tri c'hant devezh ar seziz e oa marvet 120.000 ezel eus ar c'horf-argad (95.000 Gall ha 25.000 Saoz) hag en o zouez 75.000 marvet dre gleñvedoù (kolera, brec'h-zu). Nebeutoc'h a dud lazhet diouzh tu ar Rusianed, hogen muioc'h a dud marv gant ar c'hleñvedoù. E koun ar brezel-se eo ez eus kement a straedoù er C'hwec'hkogn anvet bali pe boulevard Sebastopol (unan e Brest, e Roazhon, e Naoned...). Malakoff a reas berzh ivez evit envel ar straedoù, ur barrez nevez e departamant *Hauts de Seine* a zo bet anvet Malakoff, e Naoned ez eus bet ur c'harter anvet ivez Malakoff. Arabat ankounac'haat Yalta, kouronktrev<sup>7</sup> e Krimea, e-lec'h e kejas etrezo Stalin, Roosevelt ha Churchill e miz C'hwevrer 1945 evit rannañ etrezo Europa e dibenn ar brezel.

N'eo ket aes lavarout piv eo gwir annezidi Krimea. *Taorika* pe *Taorida* e oa anvet al ledenez en henamzer, hag un drevadenn c'hresian e oa. Gant an amzer e oa bet aloubet ha poblet al ledenez gant meur a bobl : Gresianed pontek, Skuted, Alaned, Sarmated, Goted, Kazared, o doa en em vesket tamm pe damm ; a-benn neuze e teuas ur bobl nevez, a orin turkat, da heul armeoù Gengis Khan : an Tatared. Kanttreiñ a rejont d'an Islam sunnat pa voe diazezet Khanat Krimea e 1441 dindan gwarez an Durkiz Ottoman, hag e stummjont ur gumuniezh diforc'het diouzh ar re all. Doujet ha kasaet e oa an Tatared-se en abeg d'o zagadegoù hag o drastadegoù en Ukraina, Rusia ha Moldavia. Betek an 18vet kantved e voe pleustret ganto kenwerzh ar sklaved slavat, moldavat, kirkasian gant an Impalaeriezh ottoman hag ar Reter-Krenn. E 1792 e kollas an Impalaeriezh ottoman ur brezel a-enep Rusia hag e voe ret dezhi lezel Krimea da Rusia. An Tatared en em gavas neuze bazhyevet gant ar re a oa o gwazhidi<sup>8</sup> a-raok. Kalz anezho a dec'has

kuit etrezek Turkia pe tiriadoù a zalc'he c'hoazh an Durkiz en Europa, betek dont da vezañ ar muianiver e Krimea en dekvloaziadoù war-lerc'h, rak an Impalaeriezh Rusian a stalias eno un niver bras a c'hounideion rusiat, ukrainiat, alaman ha moldaviat. War-lerc'h an eil brezel-bed, war zigarez o dije an Datared skoazellet an Alamaned o devoa aloubet Krimea, e voe harluet gant Stalin an holl Datared da Siberia, hag evel-just degaset c'hoazh Rusianed en o lec'h. Abaoe eo bet aotreet an Datared da zistreiñ da Grimea hag en abeg da se e oant 12% eus ar boblañs e 2001, hogen bloc'h ar Rusianed a save da 60% hag an Ukrainiz da 24%. E 1954 e voe roet Krimea da Republik Soviedel Ukraina gant Khrouchev, Ukrainad e-unan, evit dic'haouiñ an Ukrainiz eus ar pevar milion eus o c'henvroiz lazhet gant an naonegezh vras, hervez klevet digant ur politiker gall. A c'hell bezañ ! Hogen, suroc'h, e oa, en ur reiñ muioc'h a emrenerezh da Ukraina, da obten daou zerc'houezer en ABU (ONU). Un digarez danzeadel<sup>9</sup> evel-just, hogen a oa deurus evit ar Soviedoù d'an ampoent. Hiziv an deiz ez eo distroet an dra-se a-enep Rusia, seul vui ma-z eus bet roet da Ukraina tiriadoù rusian all e Reter ar vro, hag a zo kement a vombezennoù war-zilerc'h bet lezet gant ar renad komunour.

N'eo ket souezhus, e-keñver an dregantadoù-se, e vije aet ar maout gant Rusia er poblaters<sup>10</sup> aozet d'ar 16 a viz Meurzh e Krimea ; ouzhpenn ar 60% a Rusianed, un darn vras eus an Datared a zo aet a-du ganto en abeg, peurgetket, ma-z eo bet prometet gant Poutin ober eus an tatareg, ur yezh kefridiel e Krimea, keit-ha-keit gant ar rusianeg hag an ukraineg, pa felle da c'houarnamant Ukraina gourzodiñ<sup>11</sup> an ukraineg e-pep-lec'h evel yezh kefridiel nemeti. Tud all, e-touez ar c'humuniezhoù bihanniverek all, o deus a-dra-sur mouezhiet a-du gant Rusia gant ar spi da gaout ul live-bevañ uheloc'h gant Rusia eget gant Ukraina.

Diskleriet eo bet gant an Amerikaned ha Stadoù Kornogeuropa – hini Bro-C'hall da gentañ-holl - e oa eneplezenn ar poblaters-se, hogen gant ul live ken uhel a dud – 96% - a-du evit mont gant Rusia, e oa diaes lakaat mouezh ar bobl da devel, hag ur skouer a chom c'hoazh loskus en eñvor an dud, a zo bet arveret gant Poutin evel ur c'hleze divzremmek : degouezh Kosovo.

<sup>7</sup> Kouronktrev : *station balnéaire*.

<sup>8</sup> Gwazhiad : *victime*.

<sup>9</sup> Danzeadel : *artificiel*.

<sup>10</sup> Poblaters : *référéendum*.

<sup>11</sup> Gourzodiñ : *imposer*.

Proviñs emren serbiat e 1999, ez eo bet diframmet Kosovo diouzh Serbia gant an NATO/OTAN hag Unaniezh Europa, evit e reiñ da enbroidi Albaniz muslimat, enebourion daonet ar Serbiz hag o deus o argaset diouzh ar vro-se a zo bro orin ar Serbiz. Ne chom mui ket kalz Serbiz e Kosovo hag ar re a chom a vev en enezennadoù gronnet peurvuañ en-dro d'o manatioù reizhtriek, bepred gant an aon da vezañ taget gant ar Vuslimiz, hag an Unaniezh Europa a lez ober. Skoazellet e vezont memestra gant aozadurioù prevez evel *Solidarité Kosovo* e Bro-C'hall, da skouer. E 2008 Kosovo a zisklerias e zizalc'hiezh, kedanavezet gant holl stadoù Unaniezh Europa hag Amerika, Vladimir Putin a gomzas neuze ouzh ar C'hornogiz : *“Un diaraogad dañjerus eo, un deiz e teuio en-dro ouzh ho kenou”*. Emaomp ganti bremañ. War-lerc'h poblaters Krimea, en e brezegenn dirak izili Bodadeg Broadel Rusia, en deus V. Putin implijet an arguzenn-se : Perak pezh a zo bet kavet mat evit distagañ Kosovo diouzh Serbia, a vefe kavet fall paz eo anv evit ar Grimeiz da zistreiñ d'ar gêr ? Mar deo bet gwallet ar gwir etrevroadel e Krimea ez eo bet gwallet ivez er Balkanioù, hogen kalz muioc'h rak a daolioù kanol war Beograd eo bet graet ha n'eus ket bet a poblaters du-hont.

Stadoù evel Frañs en ur gomz eus gwir etrevroadel gwallet e Krimea a wel ar blouzenn e lagad ar re all hogen ne welont ket an treust a zo en o hini. Bez' e c'heller komz eus Bro-Saoz he deus diframmet Ulster diouzh Iwerzhon, pe Bro-C'hall he deus distaget enezenn Mayott diouzh an inizi Komora all dre ur poblaters, hogen du-hont ne oa ket evit lakaat Gallaoued da zistreiñ d'ar gêr, poblet eo an enezenn hogos penn-da-benn gant Komoriz hag Afrikiz-du enbroet ; ne chome du-hont, evel Gallaoued, nemet un dornad kargidi drevadennel aes da advroañ. Koulskoude n'eus ket ezhomm mont ken pell, tostoc'h ouzhomp ez eus ur skouer vat-tre, e Breizh emañ zoken. Bro-Naoned eo, diframmet diouzh Breizh evit he stagañ ouzh ur rannvro kevanaozel anvet *“Pays de Loire”*. N'eus ket bet ezhomm a poblaters evit seveniñ an torfed-se hag abaoe daou-ugent vloaz, pe muioc'h c'hoazh, ma vez ar Vrezhoned o c'houlenn e vefe adunanet Breizh, n'o deus kavet dirazo nemet skouarn vouzar ha goapadennoù ar Stad c'hall hor c'hemer evit tud warlerc'hiet, manet staget-re ouzh an amzer dremenet. Hiviziken e c'hellimp arverañ d'hon

tro an arguzenn-se e stumm ul lugan : “Evel da Rusianed Krimea e fell d'an Naonediz distreiñ d'ar gêr !”

Un treust tevoc'h ha brasoc'h c'hoazh ha ne welont ket, a zo e lagad Kornogiz. Gant diskar moger Berlin ez eo kouezhet war he lerc'h an Unaniezh Soviedel hag he renadoù komunourstag evel pezhioù ur c'hoari domino. Aet eo da get ivez aozadurioù komunour all evel Emglev Varsovia. NATO/OTAN a oa anv an aozadur kevezer diouzh kostez Amerika ha Kornogeuropiz. Steuziet eo Emglev Varsovia, perak neuze eo bet kendalc'het gant an NATO/OTAN ? Ha perak sammañ ganto, en aozadur milourel-se, broioù hag a oa a-raok en Emglev Varsovia pezh a ra da Rusia bezañ gronnet, peogwir eo bet klasket, er c'hreisteiz, enrollañ Georgia ganto. Klask dedennañ Ukraina en Unaniezh Europa a zo mont gant an hevelep argerzh peogwir emañ UE + NATO/OTAN en hevelep pakad-prof. Gwechall e veze lavaret e oa arabat hilligañ re mourrennoù Stalin ; n'eus ket mourrennoù gant Putin, hogen dent hir en deus ha dreist-holl daoulagad lemm. Gwelout a ra mat-tre, ez eo an UE fals-fri an NATO/OTAN. Komprenet en deus e oa bet “dispac'h orañjez” 2004 e Kiev, prientet aketus e Washington gant aozadurioù prevez (ONG) liammet gant ar CIA.

Unan eus palioù anzavet krouidigezh Europa Unanet a oa krouiñ un unvezh politikel hag armerzhel dizalc'h etre Amerika hag an Unaniezh Soviedel. Hiziv an deiz e hañval Europa bezañ deuet da vezañ hepken mevel Stadoù Unanet Amerika a zo marc'h-ambillh ur vedelidigezh gwitibunanet. Fentus eo bet komzoù Barack Obama o lavarout d'an Europiz e oa prest da bourchas dezho gaz-skilt amerikat (ho pezet soñj ez eo berzet e eztennañ e Bro-C'hall) e kenkaz e fellfe dezho dioueriñ ar gaz rusian. Ken lu all eo bet komzoù Laurent Fabius, mavdiern gall an Aferioù Diavaez, ne vefe ket deroet d'ar Rusianed an daou lestr-brezel o devoa gourc'hemennet ouzh chanterioù-listri St Nazer ; ne gredan ket e vije bet laouen micherourion Breizh da goll o labour en abeg da hevelep lavarioù brezelgar.

Ezhomm he deus Rusia da werzhañ gaz ha tireoul a ra diouer da Gornogeuropiz, hag en eskemm o deus ezhomm Kornogeuropiz da werzhañ o c'henderc'hadoù greantel evit reiñ labour d'o micherourion. Neuze, kenwerzhomp onest ha sioulik, ha goveliomp gant hor

c'hlezeier soc'hioù arar ha filzier gant hor goafioù, evel ma kuzul deomp diouganou ar

profed Izaia (2:4), pa-z eo hon interest boutin kenetrezomp.

**Donwal Gwenvenez**

## Petra eo spered “Feiz ha Breizh” *heuliad ha dibenn*

### **Broad Bro-C'hall ? Mamm al Librentezioù**

Muioc'h-mui e pellaer a ratozh skeudenn izili ar vroad diouzh hini an tiegezh ledanaet, evel “kendirvi”. Anavezet eo, padal, ar Vrezhoned evit bezañ holl kendervi kenetrezo ! Kement-se a zo natur evit gwir, rak ur vroad a zo termenet da gentañ gant ar gwad, liamm ar gwad, ar ouenn, an ADN, ha gaou eo lavarout ez eo natur ur vroad c'hoazh Bro-C'hall gant an enbroerezh aralleuropat a zo deuet da cheñch natur don, al liamm broadel, etre an dud. Mennet eo ar c'hemmesk kenelel ganto evit diskar termenadur reizh ar vroad ha mirout da genelioù evel hon hini da vleuniañ dre hec'h ijin dezhi. Pep tra a rank bezañ mesket, ha muioc'h-mui. Kement-se a sav da bell en istor vro-C'hall : meskañ a reont a-ratozh “keodedelezh” ha “broadelezh”. Ar memestra ez eo evito, a lavaront. E Breizh-Veur ez eo anavezet meur a Vroad. En tu-mañ da Vor Breizh ne reer ket. Evit bezañ keodedour gall e-pad an Dispac'h Gall e oa tra-walc'h sevel a-du gant mennozhioù tadoù an droc'herion-gouzoug : fals-filozofed ar “Sklerijennoù”... Se a zo kement ha lavarout ned eo ket ar vroadelezh c'hall ur vroadelezh dre ar gwad, met dre ar mennozhioù, evit ar re a zo aotreet da soñjal c'hoazh, eveljust.... Pa lavaren deoc'h ez eo un Iliz ar Stad-C'hall ! Evit ar re all n'int ket gouest da sevel o c'hein dre m'en em gavont e noazh, ez hiniennel, digabestret sañset diouzh o bro orin, diouzh o ziegezh, diouzh o relijion, dirak ar Stad, ar Vamm-Stad, a lavar dezho ez int libr a-drugarez dezhi, a ro librentezioù dezho, ha pergen ar gwir da zrest-vevañ gant a bep seurt sikourioù arc'hant ma ranker tremen drezi evit o c'haout met a zeu diouzh labour an dud a zo sammet-dreist gant an tailhoù. 56 % eus gounidoù an dud e Frañs a vez sunet gant tailhoù a bep seurt... En ur ger, abaoe 200 vloaz, e ra ar Vamm-Stad c'hall d'an dud karout o chadennoù. Ne c'heller ket lavarout eta ez eo an termenadur-se eus ar Vroad an termenadur reizh : un termenadur plouz eo, a zo mennet da sevel ur Stad hollvedel evit ur Mab-den a vije diframmet diouzh frammoù natur buhez mab-den : an

tiegezh, ar vro, ensavadur ar relijion. Gant mennozhiañ “Feiz ha Breizh” ez omp rediet da zisteurel eta istor Bro-C'hall evel m'emañ en abeg m'emañ o tistrujañ an Mab-den evel den.

### **Hag ar gristenion divrezhon e Breizh ?**

Moarvat ez eus tu da vezañ salvet e Breizh hep komz brezhoneg na zoken kaout bri ouzh danvez Breizh. Da unan ha na vez gant ar ger “Breizh”, nemet un anv douaroniezhel ha n'eo ket anv ur vroad, ne c'heller ket rediañ e goustiañs war ar poent-se. Hogen diskleriañ a rankomp e kavomp direizh, a-enep ar reizh, reizh an Aotrou Doue, e vefe rediet an holl Vreizhiz da zegemer ur feiz ha na vefe ket gwriziennet er vro ma vevont enni. An hent naturel e rank bezañ er c'hontrol e Breizh, war bouez nemedenoù, hinienoù diseurt. Ur c'hevala boutin d'an holl Vrezhoned ez eo ar sevenadur santelaet-se e-pad kement a gantvedoù, ur binvidigezh a rankfe bezañ implijet evit suraat ar Vrezhoned en o buhez kristen pemdez. Rak en amvevad-se, roet gant Doue, ez eus ennañ kement a zo ezhomm evit “ober hor Silvidigezh”. N'eo ket souezh eta gwelout ez eo aet da hesk an eienenn vuzhodus : stanket eo bet gant an estren. Penaos kompren a-hent all e oa brezhonegerion an daou veleg nemeto bet urzhiet en eskopti Kemper abaoe daou vloaz ?

Ret eo diskleriañ seder ha sioul, ha koulskoude mennet mat, ne rankfe ket “Feiz ha Breizh” bezañ un danvez diret evit ur c'hristen hag evit an Iliz e Breizh. Bez' ez eus ur seurt “istor kevritel” etre Breizh hag an Aotrou Doue : kas a ra adarre un ael dirazomp<sup>12</sup>,... gant ma c'houlennimp... Pennañ tra a c'hell ober un den ha na vez hogos mui graet e brezhoneg eo pediñ<sup>13</sup>. Un dever kristen eo pediñ evit e vro, a zo e familh ledanaet a-benn ar fin, hag un dra uhel-mat ez eo pediñ, peogwir ez eo komz ouzh Doue !

<sup>12</sup> Lenn 2 Makabeed 11, 6 ha 15, 22-23

<sup>13</sup> Izili « Kristenion Breizh », a zo holl izili eus E.A.T. a-hent-all, a ouestl pediñ evit Breizh gant, da skouer, al levrig « Ar Bedenn evit ar Vro », « Liderezh an Eurioù », lodenn pedennoù « Stumm dreistordinal an Oferenn ha pedennoù » h. a.

## **“En hor yaouankiz en deus Doue fiziet ennomp amzer da zont hor bro”**

Abae penn-kentañ hon Emglev, Emglev An Tiegezhioù, ez eo ger-stur hon emsav. Dibabet e oa bet gant Alan Al Louarn en e lizher diabarzh “An Tiegezh”. Diskouez a ra fraezh petra eo dever ur gwir Breizhad : servijañ e vro a zo servijañ Doue. Ober a ra dave d’ar C’heneliezh pa ro an Aotrou Doue an urzh da Vab-den da gabestrañ e vro : “Labourit ha frouezhait !”. Un uhelvennad hael ez eo, a ya a-unan gant spered “Feiz ha Breizh”. Se en deus emplegoù politikel anat : ur broadelour e oa YV Perrot, ezel eus ar C’huzul-meur. Evel Roparz Hemon hag Olier Mordrel edo a-du gant ur Vreizh en he sav, mestrez warni hec’h-unan, renet gant he bugale. Adarre, pell emamp aze diouzh ar pezh a glever en Emsav a vremañ en deus eskemmet pilhoù ar vroadelouriezh vrezhon hengounel, sañset kristen, gant ur gleizelouriezh hollvedelour ha frankizelour, dezhi ur frond rannvroelour koulskoude, hag amvedadour ivez, da guzhat c’hwezh ar c’helanou diniver ez int graet da c’holeiñ : 50.000.000 bugel diforc’het bep bloaz, 100.000.000 a dud lazhadeget en anv ar gomunouriezh, ha mil-milionou a dud gloazet en o c’hreiz donañ dre ma vezont gwasket gant ideologiezh ar Gender, diskar an Tiegezh, an Iliz, o broadelezh....

Al lavarenn-mañ a lavar ivez un dra eeun-tre a skoas va spered p’edon 16 vloaz : Krouet omp bet Brezhoned, ha krouet omp bet gant Doue ha n’eo ket gant ar Stad c’hall. N’edo ket e kambr va zud p’on bet koñsevet, respet deoc’h. Di-reizhwir ez eo ar Stad C’hall eta : setu holl !...

E berr gomzoù : reizhwir ez eo Breizh evit an Aotrou Doue (Geneliezh : « Hag e welas e oa mat kement-se holl »), ha ma n’emañ ket ar Stad C’hall evit anavezout ar reizhwiriegzh se, emañ ar gaou gant ar Stad vac’hom-se, a zizolois goude-se edo ouzhpenn ur Stad e servij mennozhioù ar Filozofed ha tamm ebet e servij ar frañsizion, evel em eus merket uheloc’h. Neuze e rankomp lakaat Breizh da vezañ hervez raktres an Aotrou Doue warni, hon dever ez eo, seul vui maz eo un amvevad dispar, abaoe 1600 vloaz a gristeniezh el ledenez-mañ, se am eus merket ivez.

**Diwar-benn istor Bro-C’hall adarre**

Pa reer dave ouzh “Feiz ha Breizh” e reer dave dre ret ouzh hon darempredoù gant Bro-C’hall en abeg ma kinnigomp ur mennozhia deg all a fell dimp lakaat e lec’h mennozhia deg ar patrom hor gwask, hini Bro-C’hall. Amañ en em harpan eveljust war preder founnus Youenn Olier a-zivout istor Bro-C’hall. Merket em eus dija edo gwarezet ar Vrezhoned diouzh levezon ar Stad (hini vrezhon gallekaet ha goude-se gall, kalz ne vern, heñvel eo...) betek ar brezel bras. Lavarout a ranker eta e oa estren dezho an istor kefridiel a vez(e) kelennet er skolioù. Un istor er saloñsoù ez eo istor Bro-C’hall, tra un nebeut a dud hepken, ha dreist-holl ne gaver nemet un dra kendalc’hus a-hed hec’h istor : kreskadurezh Domani ar Roue hag ur gevezerezh ouzh an Iliz da gaout an aotrouniezh speredel war he zouar, ur gevezerezh a zo troet alies e heskinadegoù, a wel d’an holl (re 1790-1804, re 1870-1920 en Italia, re 1904-1905 e Frañs adarre), hag alies dre zindan, evel er mare-mañ ma kred an ONU/ABU tamall ouzh an Iliz he c’helennadurezh a vije kaoz da waskadek an heñvelrevourion, ar merc’hed o tougen, ar merc’hed-na-c’hellont-ket-bezañ-evel-paotred, hag all hag all... Deuet eo an emgann da vezañ dañjerus bras evit an Iliz : un azon hon eus aze eus darvoudoù krishoc’h c’hoazh, ha ne c’hellomp ket gortoz ar wirionez digant ar meziennou bras a zo karget da verat ar c’hedveno. An dro a zeu, evel gant afer ar veleion-gwallerion-bugale ne vo ket tu da arguzenniñ (da skouer o lavarout ez eo an dregantad a wallerion-bugale kalz uheloc’h en Deskadurezh Vroadel C’hall Santel na ra hi netra ebet da gemm an traoù, er c’hontrol eus an Iliz he deus paeet ur priz uhel spontus en arc’hant, rivinet eskobiezhou ‘zo en Amerika da skouer, hag uheloc’h c’hoazh e keñver he brud...

Neuze ‘ta, evel Brezhoned, ha betek nevez ‘zo, n’hon eus kemeret perzh ebet en Istor Kefridiel. An istor-se a c’hoarveze e saloñsoù Chambord, al Louvre, Versailles ha Pariz. Breizh n’he deus bet perzh ebet, koulz lavarout, en hec’h istor e gwirionez. A-wechouigoù e reas hogen hepken evit paeañ he lod e poulladoù gwad diziwezh an istorvezh c’hall : Pontkalleg, ar Bonedoù Ruz, ar Chouaned, Konlie, soudarded 14-18, Mers el Kebir... Ha gwell a se ma n’eo ket bet re saotret brozh hon istor gant euzhusterioù istor ar C’hallaoued, rak, evel ma verken, istor Bro-C’hall a zo dreist-holl un istor kevezerezh ouzh

an Iliz ez eo deuet a-benn da lakaat da blegañ diziwezh abaoe ouzhpenn 300 vloaz. An istor-se, ouzhpenn maz eo estren dimp, ha gall, hag a-enep kristen, hag he deus awenet an hollveliouriezhioù eus an 20vet kantved, n'eo ket hon istor. He disteurel a reomp. Bezañ broadelour brezhon 'zo disteurel istor Bro-C'hall, anat eo din. Bezañ "Feiz ha Breizh" zo ivez, ha div wech : n'o deus ket mui ar feiz ha gwashoc'h c'hoazh, tud evel Peillon ha Taubira a zo mennet d'he diframmañ diouzhimp. Hag evit Breizh, gant emsav ar Bonedoù-Ruz, e weler an ezhomm groñs ez eus da gaout ar galloud divizout e Breizh : "Bevañ, Divizout ha Labourat" e Breizh eo o lugan.

**Fellout a ra dimp ur Vreizh hervez patrom "Feiz ha Breizh"**

Ya, fellout a ra dimp ur Vreizh hervez patrom Feiz ha Breizh dre ma lavar ar Feiz ar wirionez war Mab-den, war ster e vuhez er bed krouet-mañ. Ha gant Breizh ez emplegomp da gentañ-holl he gwir yezh nemeti, ar brezhoneg, a rank bezañ ur benveg yac'h, arnevez, goveliet mat, kaer – sed pezh a soñje YV Perrot pa enebe ouzh trefodaj leoneg person Treglonou, Jakig Treglonou -, arouez anat hor broadelezh, ha war-un-dro benveg kehentiñ diabarzh egin ar gevredigezh vrezhon a zo da adkrouiñ penn-da-benn. Rak petra eo an Emsav nemet egin ar Vreizh a vennomp lakaat da zont da wir ? Re alies e weler tud en "Emsav" a seblant bezañ aze evit ar blijadur ha n'eo ket evel e servij o bro.

**T. Gwilhmod**

## An araokaat hag ar galloud

Kendeuzidigezh ar galloud politikel hag ar galloud armerzhel eo ar sokialouriezh-komunouriezh, emezon a-bell 'zo, ha setu perak ez eo ur c'hresk dreistordinal er mac'homerezh hag en evezherezh. Biskoazh n'ez eus bet respontet din netra a dalvoudegezh war ar c'hraf-se, ha biken ne vo kredapl. Kunujennoù a zo bet eilgeriet din e-leizh, a dra sur, arguzenn ebet avat.

Hans-Herman Hoppe a verke ivez penaos ez eo bet degaset gant an tremen eus ar rouantelezhioù kozh d'ar republikelezh demokratelour, freuzidigezh ar vuhez kevredigezhel, tarzhidigezh an torfederezh, ha kreskidigezh diziwezh emell ar Stad e buhez an dud. Biken ne vo kavet respont dezhañ kennebeut, kredapl.

An holl re a zifenn an demokratelezh a-enep d'ar sokialouriezh a oar mat ne reont nemet difenn un droug bihanoc'h. Lod anezho a anzav zoken n'eo an droug bihanoc'h nemet an hent hirañ d'an droug brasoc'h. An dra-se a ra dezho en em gavout war an tu-koll pa vreutaont ez-foran gant sokialourion pe komunourion, anezho tud n'o deus dever ebet e-keñver ar gwirvoud istorel, anezho ivez bredklañvidi digoustiañs evit ar bras anezho. Gwelloc'h eo avat komz gant ur skoilh bennak er beg kentoc'h eget tevel.

Ar gwir gudenn a c'hall bezañ stadet evel-mañ a-benn ar fin : an demokratelezh koulz hag ar sokialouriezh a zo krouadurioù an dro-spered dispac'hel, da lavaret eo e reont o-daou

promesaoù n'int ket evit derc'hel dezho. An eil koulz hag eben a zistaol penn-da-benn ar gredenn gozh e vez renet an Istor gant lezennoù dreist-diraez d'an dud. An eil koulz hag eben a c'hourbann e rank "pep hini" pakañ krog war e donkadur ; ankounac'haat a reont an eil koulz hag eben penaos pa vez heuliet o mennozhioù e teu dalc'hmat un nebeudig bihan a dud da beurzibab tonkadur ar bras eus an holl dud all.

Kreskidigezh ar mac'homerezh n'en deus ket kalz a dra da welet a-benn ar fin gant dibaboù politikel diouzh un tu pe un tu all ; gant an araokadennoù skiantel pe kalvezel, ne lavaran ket. Ar spierezh war an holl bellgomzadennoù, ar c'hirri-nij rakluniet evit filmañ diabarzh an tiez, ar renabloù elektronek graet a-vemdez, a zo anezho araokadennoù dreist-ordinal, hag a zo ken ker ar mererezh anezho ken n'eus nemet ar Stad a c'hallfe arverañ anezho. E-giz se en em gav Yann keodedad dizifenn penn-da-benn dirak an eured dihepkoradus etre an araokaat skiantel hag ar galloud politikel. Ur bourd skrijus n'eo ken promesa ar sklerijennoù e vefe dieubet an dud gant araokaat ar skiant.

Krediñ er sokialouriezh pe en demokratelezh kevalaour ne gemm netra da arvererezh ar galvezderioù-se, a zo kalz a-us da daerañ hunvreoù hollc'halloud Hitler pe Stalin. E nep tachad ma vez ur Stad bennak, he deus homañ en he c'herz ar c'halvezderioù kerañ, hag abred pe ziwezhat, evit un abeg pe unan all, en em

voazo da arverañ an holl galvezderioù-evezhiañ-se. E pep lec'h e teu da wir diougan Jakob Burckhardt, bet graet e penn-kentañ an XXvet kantved : "Adsevel he fenn a ray an Itron Aotrouniezh, hag ur penn spouronus e vo da welout."

Sklaeroc'h c'hoazh, an araokaat e-unan eo a ro da lod an tu da vezañ mistri war yoc'hadoù-bras keleier ha titouroù, ha kuzhat a-wechoù pep tra d'ar bras eus an dud. Diverkerezh an holl fedoù displejus a zo ken boutin hiziv er stlenn demokratel etrevroadel ha ma oa en URSS pe ma-z eo hiziv er renad komunour sinaat. Ar c'h-KGB en hec'h amzer a vefe bet diaes dezhi dont a-benn eus kurioù evel mougidigezh tachadoù iskis buhezskrid Barak Hussein Obama er stlenn norzhamerikan, pe an tav e-pad c'hwezek vloaz war Forom São Paulo e stlenn Brazil.

Keit ha ma ne gompreno ket an dud penaos ar re a ginnig d'ar re all "pakañ krog war rod-stur o zonkadur" ne glaskont nemet tapout ar rodou-stur-se int-o-unan, e kendalc'ho ar frankizoù da strishaat e pep lec'h dre ar bed, hag e yelo war-zigreskiñ dalc'hmat niver an dud dieub a-walc'h evit merzout ar strizhidigezh-se.

Mignoned ha lennerion a aters ac'hanon war ar mouezhiadegoù da zont e Brazil. N'on ket dedennet ganto, tamm ebet. N'eo ket ar Stad nemetken eo mestr ar PT (Partido dos Trabalhadores) warnañ hiziv an deiz e Brazil, ar gouarnamant a-bezh ne lavaran ket, abalamour da yoc'h ar amaezhiaded ha rouedad ar

"stourmerion kevredigezhel". Forzh piv a vo dilennet da brezidant, na pa ne vefe ket ezel eus ar PT e-unan, a ranko koroll ouzh sonerezh ar PT, pe e vo graet outañ e-giz ma-z eus bet graet ouzh Fernando Collor de Mello. Kaout ur prezidant mat e penn Brazil n'eo ket an dra mallusañ. Krouiñ bagadoù stourmerion er-maez eus ar gouarnamant, a c'hello servij un deiz ur prezidant a-enep d'ar PT, ur prezidant a vezo dilennet d'ar poent mat, pa vo tu d'henn ober, setu an dra mallusañ. Ur prezidant ne zeu tud d'e harpañ nemet da vare ar mouezhiadegoù, hep stourmerion taer prest d'e zifenn betek ar marv politikel, a zo evel un houad kaoutchoug en ur stand evit pleustriñ war an tennañ.

Hervez stadegoù a gaver war al lec'hienn <http://vejamos.com.br/apenas-8-dos-alunos-brasileiros-terminam-o-ensino-fundamental-com-conhecimentos-adequados/>, n'eus nemet 8% eus bugale Brazil a dap er Skol Vroadel an deskadurezh o deus ezhomm anezhi. Keit ha ma vo ur Maodiernva-an-Deskadurezh e kendalc'ho e-giz-se an traoù. Ar gredenn eo d'ar Stad ober war-dro deskadurezh vroadel a zo unan eus ar mennozhioù distrujusañ biskoazh tremenet dre empennoù an dud.

## Olavo de Carvalho

Lakaet e brezhoneg gant **Ewan Delanoy**, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Uma observação e duas notas*, niverenn ar 5 a viz genver 2014.

## Mari e eured Kana

*"Tri devezh war-lerc'h e voe un eured e Kana e Galilea, ha Mamm Jezuz a oa eno, ha pedet e voe ivez d'an eured Jezuz hag e ziskibion gantan"* (Yann 2, 1-2). Greomp diouzhtu un evezhiadenn : anvet eo Mari a-raok Jezuz hag an diskibion. Bez' ez eo dre ma-z he deus ar Werc'hez, e euredoù mesiazel Doue gant an denelezh ur plas merket en a-raok.

E levez an eured ez eus a-daol trumm ur mank, un diouer hag a vez merzhet gant Mari hepken. Gant he c'hizidigezh e verzh n'eus ket mui a win hag e ra an evezhiadenn ouzh he mab ha n'en deus graet c'hoazh burzhud ebet. Hogen, bez' e laka anezhañ war evezh en un doare didrouz. Emellout a ra rak damantus eo ouzh eurvad ar priedoù. *"Bez' ez eus traoù na*

*gompren ket ar C'hrist, nemet pa vezont lavaret gant e Vamm ouzh e skouarn"* a lavar brav Paul Claudel, hogen amañ, e Kana, e c'heller lavarout e ra Mari dae d'he mab, hag e poulz anezhañ evel-se er vuhez foran.

Ha Jezuz a ro d'e vamm an anv a "wreg". Bez' e fell dezhañ lavarout dre se mar gra ar burzhud-mañ, n'eo ket dre ma-z eo mab Mari, hogen dre ur galloud na zeu ket diouti. Jezuz a nac'h da gentañ ober ar burzhud, rak fellout a ra dezhañ endeo lakaat ar pouez war eur e Bask, eur ar C'halvar e-lec'h an dour hag ar gwad a strinko diouzh e gostez evit peursevenidigezh ar gwir eured gant an denelezh, dasprenet neuze dre c'hanedigezh an Iliz, gwir vamm ar re vev, ar Wreg ent-wellek.

Ar respont a ra Jezuz d'e vamm n'eo ket un nac'hadenn e gwirionez. Hag ez eo a-walc'h rak evel-se e vez meizet gant Mari, peogwir e lavar d'ar servijerion : “*Grit kement tra a lavarado deoc'h*”. Ket muioc'h, evel diwezhatoc'h gant ar Gananeadez, n'en em lez ket Mari digalonekaat gant nac'hadenn he mab. Adkregiñ a ra gant ar c'hendiviz, el live denel a zo he hini. Anavezout a ra madelezh he mab. Tennet e voe ar priedoù diouzh enkadenn ar gwin.

Pezh a souezh kalz ac'hanon amañ ez eo e vez roet da Vari, an Eva nevez, an anvad « *Gwreg* », Jezuz ne ro mui dezhi an anv “*Mamm*” hogen “*Gwreg*”. Daoust hag ur rebech a vefe aze ? Ha diseven e vefe ar ger ? Nann ! Un anvad marzhus ez eo, leun a vri, leun a estlamm. Evel-se eo e vez anvet e wreg gant Adam : Eva (*gwreg* en hebreeg hag *adam* = gwaz). En Avieloù e c'harm an Aotrou Krist : “*Gwreg ! Salvete out bet gant da Feiz*” ; “*Gwreg petra fell dit diouzhin ?*” “*Gwreg petra a zo etre te ha me ?*” Bez' ez eus meur a droidigezhioù. Bibl Jeruzalem a ginnig : “*Lez ac'hanon da ober !*” Pezh a dalvez n'emañ ket ar mab hag ar vamm war an hevelep live. Bez' e c'hell Jezuz reiñ ar Spered, gwin nevez an amzerioù mesiazel, neket dre ma 'z eus un dra boutin etrezañ hag e vamm, hogen en abeg d'e orin doueel.

Skrivet eo bet gant ul Lebanad : *Pa lavar Jezuz : “Petra a zo etre te ha me, ô Gwreg ? An ton evidomp-ni, arabegerion, n'eo ket tagus. N'eo ket “Se ne sell ket ouzhit !” rak evidomp ez eo natur e teufe ar gwragez evit skoazellañ. Ne vez ket feuket kennebeut an dud gant ar ger “gwreg”. Lavarout a reomp d'hor mammoù : “Ô gwragez !” Derc'hañ<sup>14</sup> a reont holl perzhdedoù gwregel ar bed*”. Bez' ez eus un astalvenn<sup>15</sup> e komzoù Jezuz, chom a ra war var. Plegañ a ra nemet diwar dalc'husted e vamm. Bez' e c'hellomp lavarout e seven bepred ar mab pezh a vez goulennet outañ gant e vamm. Daoust ha dleout a rae Mab Doue ober ur burzhud evit leunvozañ<sup>16</sup> mestr an ti gwall nec'het ? Daoust ha deuet eo evit diluziañ kudennoù danvezel ? Bez' ez eus gantañ ur c'hourzhtaladenn<sup>17</sup> en e ziabarzh. Betek pelec'h ez ae e gefridi ? Setu ar perak eus e respont un tammig garv d'e vamm. Termal a ra alies da

<sup>14</sup> Derc'hañ : *représenter*.

<sup>15</sup> Astalvenn : *réticence*.

<sup>16</sup> Leunvozañ : *satisfaire*, ivez : *bozañ*.

<sup>17</sup> Gourzhtaladenn : *affrontement*.

asantiñ da c'houlennoù an dud, rak rakwelout a ra ar rearver a raio an dud gant madoù an douar. Bez' ez eus gantañ kendael diabarzh. Bez' e hañval lavarout d'e vamm : “ N'emaon mui er gêr, kemeret em eus va dizalc'hiezh ; dieub ez on da ober pezh a blij din”. Ya, emañ o paouez kuitaat buhez prevez Nazared. Bez' e fell ivez da Jezuz uhelaat spered e vamm etrezek an EUR-se a vo e gwirionez e hini, ha ma skuilho war an denelezh ar Spered-se a vezv gwelloc'h eget ar gwin (Kv. Akt 2/13). Ya ! Bez' ez eus aze kalz muioc'h eget c'hwec'h jarl-maen, leuniet diwar un urzh diskiant. Ar wengeleion a ziskuilh deomp, kerkent war-lerc'h ar burzhud, e kuitaas Jezuz an daol hag ez eas da avielañ, hep dezhañ zoken tañva ar gwin en devoa pourchaset. Bez' ez eo ster uhel-meurbet ar burzhud-mañ ez eo ret deomp donaat.

An Emglev kentañ, hini ar Sinai, a lide eured Doue gant e Bobl. An eil a vremenela anezho en eured ar C'hrist gant an Iliz. Kana a ra deomp soñjal en eured peurbadel a fell da Yavhe skoulmañ gant ar pried a gar hag a zo bepred Israel. Amañ, ez eo ar pried hini Kana. Euredoù atav diaes ma-z eo bet azgoulennet evito meur a ozac'h-meur ha meur a brofed. Mari merc'h Sion, merc'h Israel a zo war un dro an Iliz, pried ar C'hrist. Gant Jezuz ez eo klozadur un emglev, d'un eured, met ar wech-mañ unan padus, peurbadel. Hag ez eo Mari, an hini a samm holl sec'hed Israel eus ur gwin nevez, mesiazel. Ha Yann da resisaat ne oa ket ar listri-maen-se tonket da zegemer diedoù hogen dour evit glanidigezh ar Yuzevion. Ur gwin a c'hlana ez eo ar gwin nevez-se, da lavarout eo a salv. Ur c'hevren euredel ez eo kevren an Iliz. Mari hag a zalc'h enni an Iliz en he fezh, hag a zo he sevenidigezh beurvata a zo bezant en euredoù-se.

War-lerc'h Kana e krogas an diskibled da grediñ (Yann). Daoust hag emell Mari he dije distignet o feiz ? Bez' ez eo Mari an hini he deus kredet ar gentañ, d'ar Giminiadezh, hag he feiz en em skign. Ur parzh arbennik he deus kemeret Mari e derou buhez foran he mab. Bezant e oa pa “*erzerc'haas*<sup>18</sup> Jezuz e c'hloar evit ar wech kentañ”. Diwezhatoc'h e komz an destenn eus an diskibled, hogen Mari n'he deus ket bet ezhomm eus burzhudoù evit krediñ.

**Youenn Troal**

<sup>18</sup> Erzerc'haat : *rendre manifeste*.



Lavarout a ran “un tamm lec'hanvadurezh” - ha “lec'hanvadurezh vrezhonek” evel-just -, rak evit komz diouti penn-da-benn e Bro-Naoned e vefe ret skrivañ ul levr a-bezh, ken puilh e kaver an anvioù-lec'h brezhonek e Norzh al Liger, hag e Bro-Wenrann ez eo ken dibaot al lec'hanvioù gallek hag e vefed e Bro-Wened pe Bro-Gernev...

Nevez 'zo ez eo bet sachet va evezh gant pennad Herve Bihan e-barzh niverenn 273 *Hor Yezh* : “*Al lec'hanvioù kozh Br. Toullgoad*”. Al lec'hanv-se, *Toullgoad* a vez kavet e Breizh dindan meur a stumm : *Toulgoat, Toulgoët, Toulgouët, Toulhoat, Toulhoët, Toulhouët...* met ivez gant ar ger-mell dindan ar stummoù : *Toulangoat, Toulancoat, Toulargoat, Toularhoat, Toul ar C'hoat...* un tregont bennak a zo meneget gant Herve Bihan. Da notañ ez eo arveret darn vrasañ al lec'hanvioù-se evel anv-tiegezh, hag e tle bezañ anavezet e Breizh, gant ar merc'hed dreist-holl, hini *Toulhoat* oberour brudet ar bravigoù keltiek.

Koshoc'h e vefe ar stummoù hep ar ger-mell eget ar stummoù gant ar ger-mell, hogen un diforc'h a vefe memestra etre an daou stumm. Ar stumm *Toullgoad* a verkfe dreist-holl ur wezenn toullet da zegemer ar gwenan. N'eus nemet Leon Fleuriot, a verk Herve Bihan, en devoa gwelet en anv-se ul lec'hanv liammet ouzh aozioù bevañ ar gwenan hag o hedoù. Ar stummoù gant ar ger-mell o dije bet, hervez Joseph Loth, ur ster disheñvel a vefe “*un toull, un ode, en ur c'hoat*” graet gant an difraostadegoù en Xvet pe en XIvet kantved ; se zo ivez ar ster degemeret gant Albert Deshayes evit an anvioù-se en e *Dictionnaire des noms de famille bretons*, Editions du Chasse-Marée.

Daoust hag e kaver diouzh al lec'hanvioù-se e Bro-Naoned ? N'eus ket kalz diouto e gwirionez. E parrez *Plouzeog* (Plessé) e kaver “*Toulan*” a gaver ivez evel anv-tiegezh - skrivet ivez *Toullan, Toulalan* -, ha displeget gant Albert Deshayes en e c'heriadur evel un difraostadeg diwar goust “al lann”, evit diazezañ kêriadenoù nevez, neuze un anv da gompren *Toull+lann*. E parrez *Puñsell* (Puceul) e kaver *Toubriant*, a vefe, d'am soñj, da gompren *Toullbriant*. Aze, mestr an difraostadeg en deus lezet e anv d'ar gêriadenn nevez. O vezañ ma

krog an anv *Briant* gant ur gensonenn ez eo kouezhet an “*l*” eus “*toul*”<sup>19</sup>, mar bije bet ur vogalenn e vije bet miret evel ma vo gwelet da heul.

Deurusoc'h eo daou lec'hanv a gaver unan e parrez Anorz-h-war-an-Erz hag unan all e parrez Hierig hag a zo o-daou skrivet *Toullifaut*, daoust ma-z eo bet skrivet hini Hierig, e-pad ur mare, en un doare droch : *Tout-li-faut*, evel pa vije bet galleg. E mitaweg e vez distaget “*Toullifaw*” evel-just. Aze n'eo ket meneget “*koad*” met “*faw*”; alies e vez meneget ar ger “*faw*” pe “*fou*” e lec'hanvadurezh an tolead : parrez *Faw-Breizh, Trefoux* e *Faw-Breizh, Le Faux* e Blaen, *Penfaw, Trefoux* ha *Coisfoux* e Gwenvenez-Penfaw, *Coisvaux* e Pierig, *Le Mortier du Faux* e Konkwerezh, *Painfaut* e Davizeg... Evit ar ger-mell deuet da vezan “*i*” e-lec'h “*a*” (berradur eus “*an*”) e kaver ivez un anadenn heñvel gant Herve Bihan pa veneg *Toulicoët* e Moulleg (*Molac* e tolead Kistreberzh). *Toulicoët* a verk ul lec'hanv a c'hellfe bezañ koshoc'h eget ar re all en abeg d'an “*i*”, berradur eus “*in*”, stumm ar ger-mell “*an*” en henvrezhoneg, o tont eus an hengeltieg “*sindos*” (gwelout e *Dictionary of old breton* gant Claude Evans & Léon Fleuriot, 1985, Prepcorp, Toronto, Ontario, Canada : *in* = “*le*”, “*the*”). Neuze, hon daou *Toullifaut* a verkfe difraostadegoù e koadoù *faw*.

Koulskoude ez eus ur ger all el lec'hanvadurezh brezhonek evit merkañ an difraostadegoù ha “*krann*” eo ar ger-se<sup>20</sup> ; bez' en devoa endeo ar ger an termenadur-se en henvrezhoneg (gwelout *Dictionay of old breton*, meneget uheloc'h), hag er brezhonegva naonedat e vez kavet paot a-walc'h diouto. Ret eo notañ e vez distaget “*kreñwê*” e mitaweg ul lec'hanv skrivet

<sup>19</sup> Un anadenn heñvel a vefe da welout gant *Pouruc* ha *Pouvroux* e parrez Anorz a vefe da gompren *Poullruz* ha *Poullfroud*

<sup>20</sup> N'eo ket sklaer orin ar ger-se. Er geriadurioù e kaver evit *krann, krannoù, kranneg* : “lec'h ma kaver paot ennañ dilerc'hioù gwrizioù”, da heul difraostadurioù, sañset. Evit Herve Ar Menn a oa genidik eus Hañveg, e-kichen koadeg ar C'hrannoù, e talvez “*krann*” ur c'hoad gant gwez bras ennañ (gwelout e bennad e niv. 68 *Ar Bed Keltiek*, Eost 1964). D'am soñj en deus ar ger brezhonek *krann* ur gerentiez gant ar ger gouezelek *crann* a dalvez “*gwez*” hag ar ger *kranneg* a zo heñvel ouzh ar ger gouezelek *crannog*, gant ur ster disheñvel, met bepred da welout gant ar gwez. Ar venec'h difraosterion iwerzhonat o tont da Vreizh o dije gallet degas ar ger, rak ar ger gouezelek *crann* a zo a-hend-all *prenn* er yezhoù predennek hervez reolenn an *k/p*.

“*Cranhouët*”, neuze skrivadur lod lec’hanvioù, enno ar ger “*krann*”, a hañval bezañ levezonet gant an distagadur-se. Da notañ ivez, e brezhoneg Gwenrann e veze “*añ*” distaget “*eñ*” pe “*eñw*” e dibenn ar verboù dreist-holl, ha tremenet eo an distagadur-se er mitaweg.

Setu pezh a gaver etre Liger ha Gwilun : *Cranhouët* e Konkwerezh ha *Cranhouët* e St Dolay, *Crincoët* e Kambon, amañ e welomp evel evit lod *Toulcoat* pe *Toulancoat* meneget gant Herve Bihan en e bennad, n’eo ket skrivet ar c’hemmadur dre c’hweshañ eus “*coët*”. E St Gweltaz-Lampridig e kaver *Coëtcran*, eilpennet eo ar gerioù, met heñvel e tle bezañ ster al lec’hanv. E Fegerieg e kaver *Trégran* ha *Trégrain* e Misilheg ; ar skrivadur “*-grain*” a vez kavet ivez en *Augrain* e Safrieg : diaes eo gouzout ster ar rakger “*Au-*”, marteze ar gemell “*an*” distreset gant ar mitaweg ha distaget “*aw*” (gwelout skrivadur *Laurenan* (22) evit *Lanronan*). E Sant Lifarzh e kaver *Pingrin* hag e Pennestin *La Pointe de Pengrin*. Darn o deus gwelet “*kreñv*” (*kreñvlec’h*, savadur) gant *Pengrin*, a c’hellfe bezañ e Pennestin e-tal ar mor, hogen e St Lifarzh ez eo suroc’h *Pengran* an orin. Doareet eo kêriadenoù zo gant ar ger *krann* hepken : *Cran* er Gourgenew (Grigonnais), *Cran* e St Nazer, *Cran* e Tehilheg. E Santez Anna-Brivez e kaver ivez an *Hotel-Cran*.

Kavout a reer ivez ar ger *krann* + un anv-gwan, pezh a hañval bezañ gant *Cramphore* er Poullgwenn, a vefe evit *krann+vor* (*mor* stumm kozh *meur*) ; tra iskis, tost heñvel eo *Cramphore* ouzh *Cranmhor* (*mh = v* pe *w* en iwerzhoneg) e kichen Belfast en Iwerzhon. Un eil “*krannvor*” hon eus marteze gant “*Tranfort*” e Herbinieg, a c’hellfe bezañ bet levezonet e skrivadur gant distagadur ar mitaweg a dreuzfurm alies “*k*” e “*t*”, da skouer ar ger gallek “*crémaillère*” a zo deuet da vezañ “*tërmâyër*”. Gant *Cramezeul* e Anorzhañ hon eus moarvat *krann+mezew* (stumm gwenrannek “*maezioù*”).

Bez’ hon eus c’hoazh *Cranneuf* (bet skrivet a wechoù “*Cran-Neuf*”) e St Nazer, ha *Cranné* e Santez Anna-Brivez, hag a zo a-dra-sur evit “*kranneg*” (lec’h paot ennañ gwrizioù, eleze : *difraostadegoù*). Bez’ e c’hellan c’hoazh menegiñ *Crandélais* (*krann+deliek* ?) e Santez Anna-Brivez ha *Cranda* (*krann+da=mat* ?) e Gwenret.

A-benn ar fin, etre al lec’hanvioù gant “*toull*” hag ar re gant “*krann*” o deus ar Vrezhoneg lezet puilh o merk e lec’hanvadurezh Bro-Naoned etre Liger ha Gwilun. O vezañ ma verk al lec’hanvioù-se difraostadegoù e c’heller soñjal n’o deus ket ar Vrezhoneg argaset tud a vije bet araozo eno da heul gounid Bro-Naoned gant Nevenoe, Erispoe, ha Salaven (Salaün), plas a oa evito, met ret e oa dezho troñsañ o milginoù ha kregiñ er vouc’hal hag er bigell evit prientiñ o annezadurioù. A-hend-all, gant Kartular Rödon hon eus prouenoù e oa Brezhoned, staliet e Gwalarn Nammedia dindan aotrouniezh Kont frank Naoned ken abred ha 835.

Da skouer : un diell o tennañ da barrez Davizeg a gadarn a-walc’h an dra-se. Un den anvet Wrblon (ur Brezhon) a ro da venec’h Rödon e “*tegran*<sup>21</sup>” anvet “*Pencoit*<sup>22</sup>”. Meneget e vez en diell e voe graet an donezon-se er bloavezh XXI (d.l.e. 835) eus ren an Impalaer *Lodowico* (Loeiz an Deol), dalc’het e oa kontelezh Naoned gant *Rochowino* (Rikwin, ur Frank) ha *Drutarius* (ur Frank) a oa eskob Naoned. E-touez an testoù a sin an diell tri a zo dezho anvioù frankek : *Rocoglin* (presbyter), *Warnher*, *Bertfred*, hag unan un anv latinek : *Just*, pa-z eus nav, anvioù brezhonek dezho : *Corweten*, *Catbud*, *Riscomnit*, *Wrbudin*, *Maenworon*, *Conwalbuan*, *Haelcant*, *Drihanau*, *Liosworet*<sup>23</sup>.

An diell-mañ a ziskouez a-walc’h neuze e oa trevidion vreizhat staliet e kontelezh Naoned, zoken pa oa dindan mestroniezh ar Franked, hag e roent anvioù brezhonek d’o annezadurioù, peogwir eo *Pencoit* stumm kozh *Penhouët*. E 835 e oa frank an aotrouniezh e Davizeg, hogen e 858 e oa breizhat. En un diell all, bloaziadet 858, e ro *Hoiarnscoit*, mac’htiern Davizeg, e *villa* anvet *Urswalt* (hiziv *Orvault* e Gwenvenez-Penfao) da venec’h Rödon. Ar wech-mañ n’eo meneget na *Lodowic* impalaer, na *Rikwin* kont, na *Drutarius* eskob e Naoned ; meneget eo hepken *Salomon* mestr e Breizh ha *Courantgen* eskob e Gwened<sup>24</sup>. Ha dalc’herion ar

<sup>21</sup> Tegrin pe tigran : *domaine de 4 muids de semence avec un logis pour le maître.*

<sup>22</sup> Pencoit : hiziv “*Penhoet*” e Davizeg

<sup>23</sup> War unan eus ar peder follenn eus ar C’hartular miret e Maerdi Rödon.

<sup>24</sup> Se zo er maread ma oa Gislard eskob e Gwenrann, goude bezañ bet eskob Naoned, met evel arc’hdiagon e voe kentoc’h e Gwenrann, dindan aotrouniezh eskob Gwened. War-lerc’h ma voe adroet sez Naoned d’ar Frank Aktard gant Erispoe, evit ren ur politikerezh a emglev mat gant roue ar Franked, ne fellas ket d’ar Vrezhoneg staliet etre Liger ha Gwilun kaout un eskob frank, neuze o c’hoantoù ha droukrañsoù Gislard dizorniet a gavas o diskoulm gant un eskobva e Gwenrann ken e vevas Gislard (betek 875).

villa : Worethoiarn hag Anaulechan, hag an nav zest ma-z eo goulennet outo kadarnaat an donezon a zo dezho anvioù brezhonek nemet unan : Hoiarnngen, Holwalart, Neboc, Hoiarncomhal, Loiesweten,

Cofinoc, Catworet, Igebert, Iarnwere. N'eus nemet Igebert hag a vefe un anv frank.

**Yann MIKAEL**

## Notennoù diwar an darvoudoù gant Yann Maneguen

**Ar vanifestadeg "Jour de Colère" e miz Genver** he doa bodet kalz en tu all da 100.000 den. En o zouez e kaved bonedoù ruz, daoust ma oa bet berzet gant Bonedoù Ruz an Aotrou Troadeg, maer Karaez. Notiñ ne oa framm gwirion ebet evit an devezh-se ha daoust da se e oa micherourion e leizh, artizaned, katoliked, tiegezhioù, bonedoù ruz, homen-ed, SOS re vihan, ha kement 'zo... Ar meziennoù bras o doa holl lakaet an hu war ar vanifesterion-se, dizalc'h diouzh nep framm.

**77 % eus ar Fransizion n'o deus fiziañs ebet er meziennoù bras**, tra ma 'z eus an hanter anezho o deus fiziañs e roll an Iliz katolik er gevredigezh. François Fillon a lavar ne zistroio ket war lezenn Taubira; Vauquiez, maer Le Puy en Velay, emziskleriet katolik, o terc'houezañ a-hervez ar gatoliked en *Assemblée Nationale*, a ziskleir e sell ingal ouzh filmoù pornografek hag ivez "n'eus ket anv da zistreiñ war lezenn Veil" !

**E Parlamant Strasbourg**, goude distaoladur "renta-kont Estrella", n'eo ket bet pell kannaded an Ankou da ginnig dres ar memestra dindan anv "Renta-kont Lunacek", bepred evit rediañ riezstadoù Unvaniezh Europa da zegemer ar "Yec'hed-engenhentiñ". Komprenit : an euredoù dinatur, hag ideologiezh ar Gender...

**Europa**. Kevredad emglevioù an tiegezhioù kristen en Europa he deus roet lañs d'ur c'houlzad bruderezh a-raok dilennadeg kannaded Unvaniezh Europa : [www.voteforfamily2014.eu](http://www.voteforfamily2014.eu) . Anvioù an danvez kannaded a-du gant an Tiegezh a vo tu da lenn war al lec'hienn-se d'ar 15 a viz Mae.

En em zizober en deus graet Hollande eus e serc'h Valérie Trierweiler. Da heul eo bet diskleriet gant meur a bolitikour evel Raffarin (UMP) e vije "**prest ar Fransizion da gaout ur prezidant na vefe ket dimezet**". Sed aze ur bazenn all c'hoazh a ya a-du gant diskaradur ensavadur an Tiegezh, sellet evel un dra diezhomm, strobuz, noazus... E-keit-se en deus "disoñjet" an UMP ober anv eus ensavadur an Tiegezh en e raktres politikel nevez...

**Er Vatikan ez eo chomet yen-tre Hollande ouzh ar Pab** a zegemere anezhañ. Aet e oant e levraoueg an Tad Santel da gendivizout; azezet en doa Hollande a-raok an Tad Santel, evel pa vije bet er gêr. Daoust m'en devoa diskleriet Valls emañ a-du gant an diforc'hañ bugale hag e vez anvet gantañ manifesterion miz Genver a-enep Lezenn

Veil : "*integrated an tu-dehou katolik arloupet*" ne seblante ket bezañ nec'het o vousec'hoarzhin e-kichen ar Pab Frañsez en doa soutenet ar gristenien vat-se.

C'hoar **Manuel Valls**, pa 'z aent bep Sul d'an Oferenn pa oant yaouank, a zo en em c'houlennet ha ne 'z afe ket he breur da veleg. Abaoe en deus dibabet ur "fealded peurbadus" da Israel (gw. video war internet). Abaoe dibenn miz Genver ouzhpenn-se e c'hoarvez **rafloù plasennoù Vauban ha Vendôme** e Pariz; trapedoù aozet gant Manuel Gaz hag e warlerc'hier Cazeneuve, gant polised gwisket evel siviled alies, nemet a vez anavezet mat dre m'o deus beb a skouarnell. Met ne vez tapet ganto nemet tud peoc'hus o pediñ pe o lenn, hag e-keit-se e kendalc'h sifroù ar felliezh e Frañs da greskiñ.

**Kinsey institute** a zo bet anavezet gant an ONU evel aozadur da labourat gantañ. Un **ensavadur a-du gant ar bedo-"garouriezh"**, da lavarout eo gant perzh ar vugale e revelezh ar re vras. Kinsey a zo en em lazhet goude bezañ gloazet e zivgell, pezh a ziskouez e oa dreist-holl klañv en e benn. E labourioù tebet skiantel (prouet eo bet abaoe ne oant ket), a zo e diazez fals-kealiadurezh ar Gender implijet gant ar gronnad LGBTUVW.

**"Rankout a reomp bezañ war evezh rak ar c'hourzhstourmerion gatolik** a zo oberiant c'hoazh, ha ne vo peoc'h nemet *pa vo marv an holl anezho*" eme an alvokadez-lesbianez LGBTUVW Macary. Sed aze komzoù gwadsec'hedik ur danvez groñs-renerzh, pennhêrez Robespierre, Hitler, Staline, Polpot ha kement 'zo, hag a vez selaouet aketus gant Manuel Gaz (sellout notennig a-raok). Netra souezhus : dija e 2012 n'en doa ket kredet Hollande enebañ ouzh ar gronnad ar-re-dinatur-o-revelezh o nullañ an deiz war-lerc'h e bromesa da zoujañ ouzh gwir ar vaered d'an arbennerezh a goustiañs war graf an euzheuredoù.

**Kristengaserezh e Roazhon** : Chapel breudeuriezh Sant Pius X a zo bet forzhnet, laeret ha gwallet : an armel-sakr a zo bet digoret hag ar c'haliroù dilec'hiet e dibenn miz Ebrel. Ul lid-dic'haouiñ a zo bet graet da Wener ar Basion (ar gwener a-raok Gwener ar Groaz).

**Mouezhiadeg evit ar c'huzulioù-kêr**. Hervez sontadeg Harris ar 25/3 e weler ez eo bet a-bouez bras lezenn an eured displeberet e diskar an tu kleiz. Tra ma oant bet 90 % o vouezhiañ evit F. Hollande

ez eus bet 45 % eus muzulmiz Frañs o vouezhiañ evit an UMP pe ul listenn distrollad a-zehou.

War greskiñ ez a emsav **Farida Belghoul** (muzulmanez) "JRE"(Jour de Retrait des Enfants - Deiz Tennañ ar Vugale eus ar skol) **a-enep fals-kealiadurezh ar Gender** er skolioù a vez lakaet e penn hor bugale, zoken e Diwan (lenn en niv. 84). An itron Boutin (PCD) ha **Civitas** (Breudeuriez an Aotrou 'n eskob Lefebvre) a souten anezhi, hag ivez ar c'hentañ blog e Frañs, Ar **Salon Beige**, en doa c'hoariet hag a c'hoari c'hoazh ur roll penn-pouez a-enep Lezenn Taubira a-enep ar familhoù (Beilherien, LMPT...).

**Beihadegoù a zifenn an Tiegezh a vez bemdez abaoe bloaz** e Frañs. E Breizh e vezont gaet pergen e Ankiniz, Naoned, Roazhon, **Karaez (brezhoneg ganto** d'ar Gwener pl. Tour d'Auvergne 21e), Montroulez, Landreger...

Tennet eo bet kuit dre al lezenn an anvad (*gestion de*) "**Bon Père de Famille**" da lakaat "*Raisonné*" en e blas. Peogwir n'eus mui na Mad na Fall, n'eus mui Tad na Mamm met "*Parent n°1 pe daou*" ha ne glot tamm ebet mui al lezennoù gant ar familh naturel e Frañs. War an hevelep tachenn-emgann, hini ar gerioù, ne rayo mui ar Stad gant ar ger "**Mademoiselle**" hag e kaso hiviziken ar paperoù kefridiel d'an Itronezed dindan o anv-familh pa oant... dimezelled nemet e vefe goulennet groñs ar c'hontrol ganto. Diharz eo youl ar frankasoned da ziskar an urzh naturel. **Ur bazenn vihan ouzhpenn eo eta, war-zu diskaradur an Tiegezh.**

**Tro-lavar** (Dirinonn 2014) : "Krog eo ar big d'ober he neizh" o komz diwar-benn unan a zo krog da goll e vlev, "hanter disto".

**Notenn yezh** : lavaret e vez "Eurioù Briz", "an Aotrou Gall" kentoc'h eget "Eurioù ar Briz" pe "an Aotrou Ar Gall" (F. Morvannou).

**Lennadurioù** : Fañch Morvannou .- Julien Maunoir, missionnaire en Bretagne .- div levrenn 884 p. 40 euro franko , 5 straed Estrée 29200 Brest. Ul levr hir-mat a ra kalz ouzhpenn kontañ buhez "An Tad Mat". Ret eo en em lezel da vont da heul ar skrivagner helavar, a ya war e bouez, o kas al lenner war danvezioù liesseurt-tre : istor an Iliz, istor Breizh, gizioù an amzer, enklaskoù war ar mamenoù en deus arveret da sevel ar mell oberenn-mañ.

#### **Kemenoù :**

Kresket eo c'hoazh ar bed en tiegezh Poulle (EAT Pariz) : un trede merc'h goude Anaïs ha Marilys : Clarisse. Gourc'hemennoù c'hwec a gasomp d'ar

vamm ha d'an Tad ha kalz a c'hrasoù o sevel o ziegezh e karantez Doue.

Dónall Ócuill a zo aet d'an Anaon e miz Here tremenet. Kemeret en doa perzh e beajoù Kristenion Breizh er broioù keltiek gant e wreg Róisín «Óg» (yaouank) Ní Thuama, he doa desket mat-tre brezhoneg o labourat e presbitalioù beleien Kristenion Breizh, hag e dud kaer. Doue d'e zegemero en e Varadoz.

#### **Oberiantizoù hon Emglev**

War-bouez embannadur ar C'hannadig ha kendalc'h al labourioù a zo bet boulc'het (Bandenn-Treset war Santez Tereza Vihan, Ar Bibl, Katekiz 9-12 vloaz, Liderezh an Eurioù), e chom morgousket hor c'hevredigezh daoust m'en em gav un nebeut izili nevez, heuget moarvat gant diskaradur ensavadur an Tiegezh hag ar c'hristengaserezh a zo penn-kaoz da gement-se.

Evelkent e c'hellomp kinnig d'ar re a garfe prenañ al levr "**Diverradur Katekiz an Iliz katolik**" bet troet gant Job Lec'hvien, beleg. Al levr-mañ, war-dro 215 pajennad a oa deuet er-maez e 2005 hag a zo e dalbenn gallek "*Compendium du Catéchisme de l'Eglise catholique*". Adkemer a ra framm "Katekiz an Iliz katolik" (a gaver ul lodenn eus an oberenn-se war hol lec'hienn, bet troet ivez gant an Aotrou Lec'hvien) hogen kalz berroc'h eo an destenn hag e klask bezañ "pedagogeloc'h", "kelennoureloc'h" ma karer. Derc'hel a ra avat da niverennadur pennadoù ar C'hatekiz bras, pezh a sikour al lenner da vont eus ul levr d'egile diouzh ma vez ezhomm.

**Emaomp e soñj goulenn moulañ al levr 215 pajenn-se**, dre internet, evit nebeut-tre a skouerennoù (unan ? Tri ? Pemp ? Dek ?), diouzh ma vo tud o skrivañ dimp kerkent ha diouzhtu evit kaout en o c'herz an oberenn-se moulet e stumm ur gwir levr gant pajennoù paper. A-hent-all e vo kavet war lec'hienn EAT, ha war hini An Tour Tan, a ro dimp hegarat e aotre da gempenn ha da ginnig an oberenn a-bouez-mañ evit kement hini a venn donaat anaoudegezh e feiz dre ar brezhoneg. Moarvat e servijo da beurgempenn al levr katekiz all a zo war ar stern evit bugale yaouankoc'h (9-12 vloaz). Dre ma n'ouzomp ket da begement e savo priz ur skouerenn moulet o vezañ ma vo termenet diouzh an niver a skouerennoù rak-goulennet, e vo goulennet ar priz diwezhatoc'h, met **goulenn a reomp ma vezint urzhiadet hep gortoz** (a-raok an 10 a viz Mae).

**Koad-Ke** : an Oferenn a vo da 15 eur d'al Lun-Fask, a vo er bloaz-mañ un oferenn en he stumm dreist-ordinal da lavarout eo evel ma veze lidet da vare an Aotrou Perrot. Ar brezegenn a vo distaget gant Anton Ar Barzh.

#### **Mererezh :**

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

**Skridaozerezh :**

Ar pennadoù a zo da gas da : [jean-mariemichel@neuf.fr](mailto:jean-mariemichel@neuf.fr) , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X